



AR VRETONED D'AN TAN

War  **War**
 don kaér Chouan-ted neuz an All-man-ted full. Chouan-ted neuz an All-man-ted
An Alarc'h  **An Alarc'h**
 (Barzaz-Breiz) fall, Dont c'hoaz da zis-tru-ji Bro C'hall. Iou diou, da ou d'ann em-gann ! d'ann em gann !
 (Barzaz-Breiz)

* * *

ob ! Dunn, Dunn, daou ! d'ann em gann. Ec'h an

I
Chouan-ted neuz an Allmanted fall (diou wech)
Dont c'hoaz da zistruji Bro C'hall.

DISKAN
Din din daon, d'an engann, d'an engann.
Ho !

Din din daon, d'an engann
Ec'h an !

II
Kredi' re Gwillou, al loen brein (diou wech)
En Pariz 'oa fichef e lein.

III
Mez meur a viz a zo dija
Eman al lein-ze o iena.

IV
Neventi vad d'ar C'hallaoued
Ha malloz ru d'an Allmanted :

V
Malloz d'an drasterien groage.
Merc'hed yaouank ha bugale !

VI
An dud koz ganté 've lac'het
Hag an ilizou distrujet.

VII
Hag ar paour kez Beljik vihan
'Zo laket en gwad hag en tan.

VIII
Mez ar Franz hag he mignoned
'Vit ar Frankiz a zo savel

IX
Ha deuz an tu all d'ar mor don
Eo deut armeou ar Zozon

X
Ar Veljik, Bro-Zoz hag ar Franz.
Me 'gred er wee'h-man devo 'lanz .

XI
Deuz an Alzas betek Dixmud
'Deuz lac'het d'é millierou tud.

XII
Ha prestik rivier braz ar Rhin
Gant o gwad a vo liou d'ar gwin !

XIII
Hag ar Russi, deuz an tu ail
A wask warné gwella ma c'hall.

XIV
En Breiz-Izel ar hotred vad
A zo ét holl da vrezellat

XV
Skrignet 'neuz bleizi Breiz-Izel
O klevet embann ar brezel

XVI
Elec'h ma n emgann Bretoned
A red puill gwad an Allmanted

XVII
Ha pa gavont poired Gwillou
Ar re-man 'goue a druilladou.

XVIII
Gras d'ar Franz eman Breiz-Izel
O rei d'ei ar gwella skoazel.

XIX
Choui, tadou ha mammou kristen
Kasit da Zoue eur beden.

XX
Da c'houenn gras d'ho pugale
Dont c'hoaz d'ho kwelet en bue

XXI
Hag ive 'vit an dud varo
'Deus skuillet o gwad 'vit o bro

XXII
Ma 'vo skanv d'é an douar ien
Ha ma voint eurus da viken.

XXIII
Ma voint eurus 'kichen Doue
P'o deuz gonezet al lore !

XXIV
Kasit da Zoue eur beden
Evit ma echuo souden

XXV
Ar brezel hag e holl garnach
Gwasoc'h 'vit er broiou sovach.

XXVI
Potred ar Prus 'lec'h ma kouefont
Betek de ar Varn a chomfont

XXVII
An dour a gouezo eus ar gwe
Rai dour binniget war o be !

DISKAN
Din din daon, d'an engann, d'an engann,
Ho !

Din din daon, d'an engann
Ec'h an !

L'arvor gantec F. J. eur Pierre JAOUAN. — Tous droits réservés